

## KANTIK

**ZANTEZ KATEL**

(EUZ A ALEXANDRI)

Ton : *Me laka ma c'honfians.*

## DISKAN :

Zantez Katel viniget,  
 Patronez evuruz,  
 C'houi a zo meurbed karet  
 Gant Mari ha Jézuz :  
 Gret d'emp ni karet Doué  
 Ha karet hon nesa,  
 Evit mont gan-ec'h eunn dé  
 Enn envo da véva.

En déspet d'ho iaouankiz  
 Ha d'ho zempladurez  
 Ec'h eüz diskuelet dispriz  
 'Vit péb fallagriez,  
 'Vit holl vado ann douar,  
 Holl énorio skeuduz ;  
 Eunn dra 'vid-hoc'h 'wa dispar :  
 Karet, meuli Jézuz.

C'houi zo bèt enn ho pué  
Skoazel ar gristenien,  
Diwallerez ho gwir fé,  
Mirérez ho lézen,  
Pa deuaz an impalaër,  
Gant hé bêcho euzuz,  
Da c'hoantad holl dizober  
Enn Iliz glân Jézuz.

Lézénn ann Oan dous ha mad  
A wa hoc'h holl studi,  
Ho skiant 'wa dreist ho oad,  
Ho klevet 'wa dudi,  
Dré-z-hoc'h ar Speret Zantel  
A neuz sklerijennet  
Tud a skiant kent mervel  
Ha d'ann envo kaset.

Ho pried 'wa ho Zalver  
Hag ho pinvidigez ;  
Ar peurest, évit-hoc'h skler,  
A wa holl tromplerez.  
Kurunen ar gwerc'hézed,  
Dreist aour hag enorio,  
A wa gan-ec'h hu karet ;  
Jézuz 'wa hoc'h Otro.

War ho tâl diou gurunen  
A felle d'éc'h kaet,  
Unan meurbed kaër ha gwenn,  
Eunn all gant gwad ruziet.  
Trec'h ho pourrev hé unan,  
Dré ho tiskadurez,  
Heuz hét ' baz er Vro diboan  
Loden ar verzérez.

Spéréjo sélestiel  
War ménez Sinai  
Deuz douget war ho c'haskel  
Korf bugel pur Mari.  
Evel hon Zalver Jézuz  
Hoc'h hét merzériet,  
War lerc'h ann Oanik skeduz  
Gwerc'hez ive kerzfét.

Troet éta ho sell  
War-n-omp ho pugalé,  
Plijet kas hon pédenno  
Bété kalon Doué.  
Reit d'emp ni gwir sklerijen  
Ar fé hag fizians,  
Ma momp deuz ar gwir gristen  
Ar c'haëra espérans.

Patronez karantézuz,  
Distaget hon c'halon  
Deuz treo ar bed ma riskuz,  
Leun a demptasion,  
Ma teui ann diskadurez,  
Roet gant hon Zalver,  
Enn hon iné da rei frouez,  
Da vean d'emp holl kér.

Gret ma teui hon inéo,  
Dre Jezuz ha Mari  
Da lugerni a c'hraso,  
Glân ével hoc'h hini :  
Ma c'halfomp ni hon unan,  
Enn baradoz Doue,  
Joauz heul dré holl an Oan,  
Béva deuz hé vue.

Gwerc'hez zantel, truézuz,  
Klevet ouz hon péden,  
Eur c'hlenvet ankéniuz  
War-n-omp ni a boez krenn :  
Plijet d'ho Mestr éternel  
Kas hon huanado :  
War hon anken gret eur zell,  
Dizéc'het hon daëro.

Attribué à Mr SALIOU, vicaire de LA ROCHE, nisi forsan le  
dernier couplet ajouté en suite

Rei à réomp daou-ugent devez induljansou da gément-hini a gano  
ar c'hantik ma gant gwir déoliez.

† AOGUSTIN.

*Eskop Sant-Brieg ha Landreger.*

